

- 5 D'an drouk-spered ha d'e blijadureziou
Hor boa neuze trôet kein evit mat ;
Met abaoe pet gwech, dre hor pec'hejou,
Dindan e yeo omp aet d'en em lakat !
- 6 Hirio avat, 'vel da zeiz hor badiziant,
Ni a fell d'eomp, gant bolontez divrall,
Trei kein a-grenn d'ar bed ha d'an érouant
Ha chom atao kristenien didamall.

Etre kampr ar vadiziant hag ar gador-goves.

- 7 O va Jezuz, 'vit rei pardon d'ar pec'her,
Hoc'h eus savet Kador ar Binijenn ;
Met nag a dud a jom e-pad hir amzer
Hep dont morse da glask hoc'h absolvenn !
- 8 Pet ha pet all a ya d'ar gador-goves,
Hep an zav piz o fec'hejou marvel,
Hep keuz ebet d'o brasa fallagriez,
Na c'hoant ebet d'en em renta santel !
- 9 Ni hon-unan, hon eus ivez disprizet,
Ouspenn eur wech, Sakramant ar pardon ;
Met dizale ni 'zeuio, leun a resped,
D'hen digemer gant gwir contrisïon.

Etre ar gador-goves hag an aoter vras.

- 10 O va Jezuz, e sakramant an Aoter
C'houi evidomp eo Bara ar vuhez ;
Met pet ene, lezirek d'ho tigemer,
A gav gwelloc'h gouzanv an dienez ?
- 11 Darn all, siouaz ! a ya da gomunia
Gant kalonou leun a vreinadurez....
Pebez torfed ! rei d'ar Mignon ar gwella
Ar pok euzus, pok an drubarderez !
- 12 Meur a hini, — skrijus eo hen lavaret, —
A gred warnoc'h astenn o c'hrabanou,
'Vit ho kwall-gas, e-giz diaoulou kounnaret...
Penaos warno ne gouez ho kurunou ?

Kaout fizians

- 7 Daoust d'am buhez nebeut kristen,
Ne dec'hin ket eus ho kichen :
Fizians am eus, o va Jezuz,
En'ho Kalon drugarêzus.
- 8 Fizians am eus : rak c'houi 'zo mat ;
Mall eo ganin ouzoc'h tostaat,
O va ene, redomp ~~founas~~ ^{buan}
D'en em vaga-ouz taol ~~Jezuz~~ ^{an Oan}.

Kaout karantez

- 9 O va Salver, na me ho kar !
'Vdoun oc'h bet war ar C'halyar
Och bet er groaz teir eur amzer,
Hig e chomit war an aoter.
- 10 O va Jezuz, na me ho kar
Deist kement 'zo war an douar !
Epep kalon c'houi 'dle beza
Ha kaout atao ar plas kenta.


GOUDE KOMUNIA

Adori.

- 1 O va ene, bezomp eürus !
Ennomp breman emä Jezuz.
Warnomp buan prennomp an nor,
Ha chomomp sioul gant hon tenzor.
- 2 War va daoulin stouet izel,
Me hoc'h ador, Salver santel,
Me hoc'h ador, Den ha Doue,
C'houi eo va Mestr ha va Roue.

Karout.

- 3 P'am eus ar c'hras ken talvoudus
D'ho kaout ganin, o va Jezuz !
Gant levenez me a lavar :
O va Salver, na me ho kar !



- 4 Ya, 'n eur dridal e lavaran :
O va Mestr mat, nag ho karan !
Met ra gresko ennoun bemdez
Tan dudijs ho karantez !

Trugarekaat.

- 5 Mil bennoz d'eoc'h, o va Doue !
Da veza deut e va ene.
Met kaer am bo trugarekaat,
N'hellin morse ho meuli mat.
- 6 Sent hag aelez madelezus,
Evidoun-me, meulit Jezuz.
C'houi, dreist pep tra, Gwerchez Vri,
Kanit d'ezan mil meuleudi.

Kinnig.

- 7 Me a garfe, o va Salver,
Beza brokus en ho kenver ;
Met petra d'eoc'h c'hellfen kinnig,
Pa n'oun nemet eur reuzendig ?
- 8 Da vihana, o va Doue,
Me 'n em ro d'eoc'h korf hag ene,
Da labourat evit ho kloar,
Keit ha ma vin war an douar.

- ~~Met me 'zo bresek, o va Jezuz,
Hag an henchou a zo risklus :
Va skoazellit eta bepred,
Ma ma kerzin hep lamm ebet.~~

- 10 Grit ma tec'hin diouz ar pec'hed,
'Giz ma tec'hfen diouz an naered,
Ha ma reinin hiriziken
Buhez dinamm eur gwir gristen
Ha ma reinin hiriziken
Evel ma 'ver ar gwir gristen !

GOUEL AR PARDON

Ton : *Pitié mon Dieu.*
pe : *Cœur de Jésus, doux espoir de la France.*

*Pardon, va Jezuz,
A c'houlennomp ;
Dre ho poaniou estlamus
Ho pet truez ouzomp !*

*Kalon Jezuz, Kalon leun a druez,
Selaouit mat hor pedenn hirvoudus :
Keuz bras hon eus da bep fallagriez,
Taolit warnomp eur sell madelezus.
Pardon, pardon, o tenera Kalon !
Pardon, pardon, Kalon Jezuz, pardon !*

*Poziou da gana etre an aoter vras hag ar gador-
brezeg.*

- 1 O va Jezuz, gwechall tud a vilierou
A selaoue ho komzou benniget.
Darn koulskoude, nasket gant o gwall-youlou,
'Barz an dizurz a jome kaledet.
- 2 Kouls ha gwechall, breman c'hoaz c'houi a brezeg
Dre hoc'h Iliz e pevar c'horn ar bed ;
Met nag a dud a ra goap ouz ho peleg,
Hag ouz ho komz a jom bouzar bepred !
- 3 Ni hon-unan, ni a zo bet lezirek
Da studia lezenn hoc'h Aviel ;
Met a-vreman e labourimp kalonek
Da zeski mat ho kenteliou santel.

Etre ar gador-brezeg ha kampr ar vadiziant.

- 4 O va Jezuz, goude gras ar Vadiziant,
Ni a oa kaer ha mignon da Zoue...
Allas ! allas ! pet gwech omp bet diskiant !
Pet gwech omp bet er vouilhenn abaoe !